

248

Son
Coz - Cozeg Dom Olier, Person Lanvellec.

(420)

Var ton :

Trist eo an amezeyen, ha trist Dom Olier
Trist eo e oll vignonet, ha trist e oll dud qer ;
En eur g'ir en general, glac'haret eo an ol
Er baros a Lanvellec, en escopti a Dol.

An neb a vije eno derguener diverza,
Var dro t'ir heur eus an nos, pe beder d'an ira,
A vije cri dreist-muzur, ha diremors meurbet,
Ma na deuje e galon da verza contristet.

Eno en dije clevet glac'har, melancoli,
Calz eus a huanadou, ha calz demeus a gri,
D'ar paour-qez Dom-Olier ha de goz Cozeg qez,
Pini aboe an nos-se a voa lojet ermes.

Goude m'en devoa laret neuze e vreunial,
Hac en d'ar c'hrec'h da boumen evel an ordinal,
Da studia e zermou, da laret e gentel,
Evel m'expliquer d'ar bobl ar zul en Avel.

(421)

Pa eruas var ar plaz, en devoe epourant,
O velet en e Cozeg qer buan chanchamant ;
Hac en o vont d'e c'hichen, d'e fedi da zavel ;
Ja, va Mestr, me 'r Cozeg, e yan sur da vervel.

Hac en o cregi enni d'astey e feder gar ;
Pa zave eur penn anei e ye un al d'an douar.
Pa na el gant e oll nevez e laqat da gerzet,
Hac e o vont da glasq sicour digant e vignonet.

Mes ar paour-qez Dom Ervoan, pa eruas er plaz,

En em gar mui estonet eget e vignon bras ;
Ar pasur-qez Dom Olier en devoa couraj vad,
Ma larias da Dom Erwoan : Divisomp hon dillad .

(422) Gredi a ra an daou Vêleg erui eus a bep penn :
Pa zavont ar goz Garezeg , e teu d'en em asten .
Eur soupçon hac eur grenez a deu d'o sezissa ;
Ma c'hejont da Ropabuon da glasq orvieta .

Dont a ra an daou Vêleg neuse da glasq queneud ,
Da ober tãn er mene da doma ar Garezeg ;
Hac eno tro pad eiz-de remejou a rejont ,
Ha bete fin e bue eno en e soijnont .

Setu maro 'r goz Garezeg . Ma lar Dom Olier :
Va c'honsolit , Dom Erwoan , va c'honsol , va breur ger .
Peros erjin - me brema da zermou dre ar vro ,
Pa vo comandet din - me mont d'am stacionou ?

Selaout , Dom Olier , a lavar Dom Erwoan ,
Ma soujit en ho cazez , c'houi o po calz a boan .
Pa ve eruet maleur eo ret en ancous :
Eur mad al rai Doue dec'h en plaz ho lazeg qez .

(423) Me a laro dec'h euz dra a dle o consoli :
Ret vo qigniat e groc'hen , e gass da repassi ;
Neuze refot eur jupen qercoulz hac eur bragou ,
Ha men gant an remorant a rey eur gamachou .

Gouir a leres , Dom Erwoan , eme Dom Olier ,
En ober a rin certen , rac ger eo ar mezer .
Mes c'hoas evit qementae , me a vo jenet bras ;
Me garje caout va c'harezeg , ha bale carzi 'r noas .

Neus get meur a barosion bars en escopti Dol ,
Ne non - me bet o sermon , carzi sur enne oll ;
A dal ar qer a Lambal memes bete Roazon ,
A gichen qer Saut-Briec bete qer Lannion .

A gichen qer Landreger da baros Lojivi ,
Dvias ha Peros - Qirec , dre oll an escopti ,

250

Me meus grêt stacionou gant va c'hoz C'hezeg q'ez,
Pini tro pad ugent vla am douge alies.

(424)

Dougen a rê - hi dime darn eus va dillajou,
Va bonet, va surpilis, ha darn va zermou; ;
Ha neuze en e renen da dremen ar pave,
Ha ma coeze arichou e save adare.

Epad ar miziou gouañ, tri pe pe var bla zo,
E tisqennen divarney da dremen ar poullou;
Ha neuze me a gerze aroc pe var e lerc'h,
E c'hundui ren erfat, marc'hat mad voa ar c'herc'h.

Lavaromp vit va C'hezeg ol un De profundis;
Rac caer en bo c'hoer' en he reor, ne deuy mui var e gis.
Adieu, penlezen ar c'hezeg; me ya brema d'ar gêr:
Te vero bepret en calon da vestri Dom Olier.

(Vol. II, p. 420-424.)
18 strophes numérotées.